

21

Euz bar an env, o Sant Patron,  
Sellit gant joa ouz tud Leon,  
O kana deoc'h meuleidiou  
Gant ho c'halon hag ho moueziou.

22

Ho Relegou a zo brema  
Enn Arched-aour ar skedussa,  
Ha dirazo hiviziken  
Ni gasso deoc'h mouez hor peden.

23

Grit ma jommo grizioù ar feiz  
Doun e kalon kristenien Breiz,  
Evel grizioù ar guez d'ero  
E kreiz kalon douar hor bro.

24

Roit ho pennos d'an Eskibien  
Hag ive d'an oll veleien,  
A zo deut ama gant dudi,  
Da gana deoc'h fors meuleudi.

25

Ho pennos ive d'ar Person,  
Den a feiz ha den a galon,  
Hen deus henchet he vugale  
Gant karantez varzu Doue.

26

D'ar iaouankis roit ar furnez,  
D'ar vugale sentidigez,  
Ha d'ar gosni kalon nerzus,  
Vit divoaska buez poanius.

27

Gant alc'hoez aour ho pedennou  
Digorit deomp dor an envou,  
Ha ni gano deoc'h mill bennos  
E kreiz dudi ar Barados.

IMPRIMATUR

Corisop. die Junii 19<sup>o</sup>

CORRIGOU,

Brest, imp. rue Traverse, 18.

vic. gén.

8N2-4-042

## DA ZANT-POL-A-LEON

MEULEUDI HA PEDEN

Andante

Kanomp, Ka\_nomp a greiz kalon Meu\_leudi  
Sant Pol a Le-on Ha goulen\_nomp, dre ar be-  
den, Eus he ven\_nos an a\_lu-zen, Ha goulen-  
nomp, dre ar be\_den, Eus he vennos an a\_lu-zen.

2


Gant tudchentil huel savet,  
Pol, e Bro-Zaós a zo ganet;  
Lagad Doue, gant he vennos;  
A bare varnhan deiz ha nos.

3

E skól Sant Iltut dizale  
Pol a zesk mad lezen Doue;  
Tremen a ra he iaouankis,  
Oll da Jesus, oll d'an Ilis.

4

Hermit-iaouank, beleg santel,  
Galvet da zont da Vreiz-Izel,  
Lezit ho pro, treuzit ar mor,  
Ha deuit brema varzu Arvor.



Kalon ar bobl a zo rannet,  
O klevet Pol o lavaret :  
Va bennos deoc'h ! ha ken-avo,  
Er Barados evit ato !

Gant enn neubeudig tud-Doue  
Var eul lestr skân e pign neuze ;  
Gant El ar mor al lestr henchet,  
Dirak Bussa a zo kasset.

Diskan e ra en enezen,  
Evit prezeg ar feiz kristen ;  
Gounit e ra dre nerz komzou  
D'ar guir Doue kals eneou.

Tud an enez 'zo glac'haret,  
Pa lavar Pol e zeo galvet  
Da vont larkoc'h e douar Breiz,  
Evit kass sklerijen ar feiz.

Dont e ra beteg Enez-Vaz,  
En eur ober burzudou bras ;  
Digemer mad hen deus eno  
Digant Witur, roue ar vro.

Kichen ar mor, en eun toul doun,  
E zeus eur sarpant bras-estoun,  
Hag a ra spount an enezen ;  
Rag drebet hen deus meur a zen.

Hep aoun ebet, setu ar Zant  
O vont da stourm ouz ar sarpant.  
Al loan a iud, an dud a gren ;  
E pep kalon e zeus anken !

Gant eur stôl zantel chadennet,  
Da heul ar Zant e rank kerzet.  
Tolt eo var he benn er mor bras :  
Oh ! pepeus joa en Enez-Vaz !

Anaoudek mad d'an den zantel,  
Witur 'ro dezan he gastel.  
Neuze Pol a dremen ar mor,  
'Vit dont da jomm da Oxismor.

Kear Oxismor zivar neuze  
'Zo gounezet-oll da Zoue.  
Chenchet eo an hano dezhi,  
Ha Kastel-Pol e rer outhi.

Nag a draou kaer ha burzudus  
A ra Sant Pol abers Jesus !  
Ar mud a gomz, ann dall a vél,  
Ar pec'her paour a zeu santel !

El lanneier hag er c'hoajou  
Men-hir, dôlmen ar fals doueou  
Dre nerz ar zant 'zo diskaret,  
Ha kroaz ar C'halvar 'zo savet.

Gant ar Roue ha gant ar bobl  
Goulennet eo evit Eskob,  
Kenta eskob a vro Leon :  
Oh ! nag a joa e pep kalon !

Goude buez hir ha santel,  
Pol 'zo brema e renk huel,  
E touez ar Zant hag an Elez,  
Gant kurunen ar zantelez.

Kaer eo ar c'hleuziou alaouret,  
Kaer eo an Tour-Dantelezet,  
Kaeroc'h eo c'hoas, Eskob santel,  
Ho C'hilis-Veur e kear Gastel !

O gouel dispar, gouel a enor,  
Gouel a vennos evit Arvor !  
'Tridal a ra kalon an oll,  
En eur zével varzu Sant Pol.